

YF_0094_Ar bloaz paseet e oan dimezet v 2.0

Ar bloaz paseet ' oan dimezet, bravig 'z eo bale
Me 'grede biken 'vijen bet, bravig ez eo bale bale
Bravig ez eo bale, med glav a ra bemdez.

Me ' oa dimezet gant unan,
Na oa na bras na re vihan,

Na oa na bras na re vihan,
Med un tammig ' oa fencan,,

Pa ' laren dezhi ober un dra,
'kichen an tan 'yae da dommañ,

E-tal an tan ha d'he gwele,
E lare din-me mond ive,

Ha me a oa ken sod hag hi
Teurel ma botou, rmond ganti,

Pa oan em gwele kousket mad,
N'ehane ket d'am harlinkad,

Hag ur pennadig goude-se,
Karget an ti a vugale,

Pemp war ar bank, pevar er gwele,
A rafe nav a vugale,

Nav all 'zo bet digant Doue,
'rafe triwec'h a vugale

Merc'hed yaouank pa zimezont,
A oar mat-tre petra ' reont,

Paotred yaouank pa zimezont
N'ouzont ket rnat petra 'reont.